

KURUNEN AOUR

ANN ITROUN VARIA VIR-ZIKOUR (1)



Pii IX, hon Tad Santel ar Pab,
A gar ar Werc'hez hag he mab!!!

Peedomp holl gwerc'h Gwir-Zikour...
H drech'h ann evel hez ean douar!!!...

War don : *Gwerz santez Anna.... Pe : Glac'h ar Werc'hez...*

I.

Deut holl, bugalez Mari, da gana gan-en-me
He gloar hag he meuleudi, he santelez ive;
Rouanez vraz Breiz-Izel zo breman kurunet
E Gwengamp, ar gear euruz, deut holl ha selaouet :

Ar vrud euz he burzudou a ia e meaz a Vreiz;
E Rom ho anaveer kerkoulz hag enn he c'hreiz;
Evelse eur gurunen zo d'ezhi digaset
Gant hon Tad santel ar Pab, pastor ar bastored.

(1) Kurunet e Gwengamp ann 8 a viz Gwenn-golo 1837, e hanec'h
bon Tad Santel ar Pab.

— 2 —

Ann eiz a viz gwenn-kolo, bloaz anter kant-ha *seiz*,
Eo kurunet ar Werc'hez rouanez santel Breiz,
Dirag eur bobl ar brasa daspugnet a bep bro :
E-despet d'ann amzer fall eo tom ar c'halouno !!!

II.

Erru eo ann iskibien hag ar c'hurunenno ;
Sellit brema ouc'h Gwengamp ; piou he anavezo ?
Goloet eo ar pavez gant eunn niver a dud,
Ha koulzkoude ne glever e kaer nemeur a vrud.

Ho Gwengamp ! ann eurus a-touez ann holl geariou,
Hen-noz e zo pemp eskob d'ndan da doennou ;
E ma ann Aotrou ar *Mé, Sergent ha Robiou,*
Hailandier, Pelerin, eskop a bell broiou !!!

Goloet ez out breman gant mantel du ann noz,
Hag ann eled d'ar Werc'hez a gan er baradoz
Meuleudi, gloar hag enor evel mamm hon Doue ;
Warc'hoaz vintin kan ive da gantikou nevez.

III.

E ma ann heol e para al laboused a gan,
Hag ann hoabl a zo ker ruz hag eur mored a dan :
Da leuriou a zo karget gant eur bobl leun a feiz ;
E ma da gleier e-brall, krena ra douar Breiz !!!

N'em stou breman d'ann daoulin evit pedi Doue ;
Lavar d'ezhan a galoun : « Deoc'hu mil zrugarez
» Da veza skuillet war-n-ouz eun niver a c'hraso
» Dre zaouarn ar werc'hez sakr, me he c'haro ato.

» Me na esperni netra evit he enori
» Lienach a vo laket euz mogerio peb ti ;
» He hanoo a vo skrivet war ma holl baniero ;
» He skeuden a vo douget ebarz ma holl ruio. »

IV.

E-porchet kaer Gwir-Zikour sellet hag e welfet,

Deut da ober ho gwestlou kalz a belerined ;

Gweled a refot eno kernevat hir he vleo.

Tregeriad ha Leonard, Gwenedour be feiz beo...

Eno e welfet ive eur vamm pleget he fenn :

He c'hrouadur war he brec'h, gant-hi eur c'houlaouen;

Pedi a ra ar Werc'hez da gemer he bugel

Dindan he dourn da viken, ha pa renko mervel !

D'eomp breman d'ann iliz, sellomp peger kaer tra,

Diwar ar pavez d'ar volz, mezer deuz ar c'haera ;

Ar vein holl zo goleoet, hag a uz d'ar skeuden

Eur chapel wenn erminet a ra eur gurunen !!!

V.

Petra a welann erru du-hont a dreuz ar glao ?

Eur groaz hag eur banier kaer a zo o tont war sao :

Chetu eur prosesioun denet a dreuz ann dour,

Evit kreski he enor da Werc'hez Gwir-Zikour!

Gwelet a rann c'hoaz kroaziou, banierou ar c'haera

E erruont e Gwengamp ; allaz ! glao braz a ra...

Na heller ket ho sevel e-despet d'ar c'hoant zo

Da zaludi ar Werc'hez e-toul he dor gant-ho !!!...

Sellit e tu ma kirit bepred e teu eugrouez

Da gaer Wengamp da welet kuruni ar Werc'hez :

Ama eur prosesioun, du-hont pelerined :

Itroun Varia Wir-Zikour..... a leverout bepred !!!

VI.

Gwelomp breman war leur gear, en aoter ar gaera,

Savet dindan bolz ann env evit oferenna :

Eno ar skeuden santel hag ar c'hirunenno

A vije bet lekeat ; mez ober a ra glao!...

Enkrez zo er c'halonnou o welet kement-se ;

Pedi a rer ar Werc'hez da gas kuit ann arne .

Pa glever c'hoaz o vralla kleier an ilis vraz ,

E red ann holl da glevet ann oferen a c'hras !

Ha goude ann oferen zo deut eur skrit-embann ,

War bec'hini oa skrivet d'ar bobl ar c'homzou man ?

• Goude kreiz-deiz da deir heur , e vez kurunet

• E-gwir-Zikour , war leur gaer , ar skeuden vinniget ,

VII.

Peoc'h breman , kristenien , erru eo ar skeuden ,

Douget gant pevar beleg warlec'h he c'hirunen ,

Hag evel penn eunn derven savet dreist ann holl wez .

Ez-eo savet ar Werc'hez pell dreist ann holl wragez !!!.

Ho ! leveromp oll breman gant ann el Gabriel :

• Ave gratia plena , rouanez Breiz-Izel ,

• Ave Maria , mil gweach , ave Maria c'hoaz ,

• Ave Maria bepred d'eoc'hu , mamm leun a c'hras !!! .

Sellit ouch ann iskibien , ha c'harzit da wela ...

Sellit onc'h ar veleien , e mant holl o kana

Gloar da batronez Gwengamp ; gloar d'ezhi da viken ...

Gras d'ezhe da vont eun deiz da ren enn he c'hichen !

VIII.

Erru breman war leur-gear , sellomp holl ar skeuden ;

Chetu-hi war ann aoter : leveromp hor peden ...

Ouc'h he zreid ann iskibien , e-dro d'ar gurunen ,

A gan holl ar Sub tuum araok ar vinnigen !

Kouezet eo ann dour santel war ar c'hirunennu ;

Kanomp gant ar veleien , unanomp hor moejo .

Leveromp ive gant-he ann O gloria ,

Hag a galoun kurunomp neuze mamm ar gwella !!!

Klevomp aña aotrou *Sergent*, eskop bro Kaourintia ;
Gant he galoun breiziaded el lavaro d'imp-nin :
Derc'hel hon deoligez, choum stard ebarz er feiz,
Ha mervel mil gweach kentoc'h evit dispriza Breiz !

IX.

Lampad a ra ma c'haloun ha douar Breiz a gren ;
Ar c'bleier a zo e-brall, ar c'hanoliou a denn :
Eur sioulded leun a respet a welann war leur-gear ;
Hag eur baradoz terrien e-Gwengamp a weler!!!...

Ele diouc'h ann envou, c'houi sent ha sentezet,
Diskennit war ar c'houmoul denit holl da welet
Kuruni hor fatrounez Rouanez an douar,
Goude ma-z-eo kurunet gant ann Dreindet er gloar.....

Ho patrounez Gwir-Zikour! bezit ouzin truez ;
Reit d'in ar c'hras d'ho kwelet enn env gant ann ele ;
Keit a vin war ann douar ho pezit sonj ouzin ;
M'ho pedo sul, gwel, pemde hag enn heur ma varvinn!!!

X.

Tostait, pelerinet, ha sellit hon eskop,
Ann eurus a zo hirio aman e-touez ar bobl ;
Astennet eo hé zivrec'h a-uz da vab Mari :
ENN hano hon Tad santel he teu d'hen kuruni !

Petra a dremen breman ebarz enn he galoun,
P'eo astennet he zivrec'h a-uz penn hon Itron ?
Hep mar hel lavar d'ezhi pedi evit ar vro,
Ha kaout eur sell a druez evit-han pa varvo !!!.

Ann holl a bed a galoun gant ar Pastor santel,
A bed gant daero a joa patrounez Breiz-lzel,
Da zerc'hel unvan ha peoc'h e-touez ar bobl kristen,
Ha da drei diwar ar Frans ar gernez, ar yosen !

XI.

Déut breman, aotrou Persoun, (1) e Gwengamp ker karet;
Ho touru war ann aviel, koulz hag ho kureet. (2);
Touit breman, war hole, derc'hel ar gurunen
War benn ar Mab hag ar Vamm, hep he lemel biken!.. (3)

Ha kerkent pevar beleg a dosta d'ar skeuden
He c'hemer war ho diou-skoaz, hag holl enn eur rengen
E vale aun iskibien, ar valeien goude.
Mes eunn engrouez ar vrasa a oa eno neuze!

Mari, henvel euz ann heol pa sklerijen ar bed,
A ro sklerijen ive breman da nep he sed.
He ma ebarz enn iliz gant he c'hurunen aour.
Ha klevet a ra peden ar pinyik hag ar paour!

XII.

Piou a deu du-hnot breman deuz a draou ann iliz
Gant eur gantel ker pouner ken a-z-eo dija skuiz ?
Hen-nez ez-eo Maer Gwengamp, servijer d'ar Werc'hez,
Deut enn hanoo Gwengampiz d'he rei d'ho fatrounez !!!..

Pa-z-efot da Wir-Zikour dalc'hit ar sonj bepret
Penaoz e kafet eno absolven d'ho pec'het ;
Kaout a refot da viken pep seurt indulj'no,
Iec'het, dudi ha sikour enn ho holl ezomo!!!!..

I. M. AR IANN.


(1) Ann aotrou J.-M. Robin,

(2) Ann aotroune, Skolan, Goff, Loas ha Pasko.

(3) Ma ne weler ket da bep amzer ar gurunen aour war benn ann
Itronv Varia Wir-Zikour, ne dilear ket tamal kement-se nemet
d'ann aoun d'he guelet laeret, hag hor bro privet, da viken,
d'ionc'h eur merk a garantez vrax hon Tad Santel ar Pab evit hor
Fatrounez, a frealzidigez evit ar p-lerin, he gwel, a dreuz he zae-
rou pui, pa den d'he zi, war benn ann hini en denz great evit-han.
marteze ouc'h-penn eur burzud !!!.....

Peden d'ann Itroun Varia Wir-Zikour.

Itroun Varia Wir-Zikour,
C'houi zo rouanez kurnnet
Hag a c'harzo hon enebour
Pa welfot he bechou stignet ;
Ho ia ! Gwerc'bez mirakuluz,
Gloar, enor, souten Breiz Izel,
C'houi hol laka holl evuruz,
Hag a rai d'imp eann deiz mervel
War galoun sakr ho mab Jesus !!!... Amen.



GWEN GAMP

GANT AR PARDOUN.

War don : *Gwerz santez Anna.*

Petra nevez e Gwengamp a zo énn devez man ?
E-pad ann deiz nemet trouz ha tremen na glevann :
Deac'h diveza d'ar c'houls man ne oa netra e kear,
Eunn dra benak zo nevez, ne ket eunn dra dister.

Ho ! ia, eunn dra zo nevez ha ne d-eo ket dister :
Eunn dra burzuduz awalc'h, ha dirak ann holl sklear :
Gwengamp zo el levenez, o sonjal er Werc'hez;
Chetu devez ar Pardon, devez he fatrounez.

Gwengamp a zo re vihan evit eur bobl ker braz :
Pelerined a zo leun, erruout a ra c'hoaz
A Wened hag a Gerne, a Leon, a Dreger;
Ha dre ann hent e kanont meuleudi ho mamm ger.

E kear dre ma erruont, e redont d'ar porched,
E-leac'h e ma gant he zae ar skeuden vinniget;

Gwir-Sikour d'an oll Vreizis, Gwir-Likour d'ar bed oll :
Eunn den deol d'ar Werc'hес ne d'ai biken da goll.

Ha goude eur beden verr, e vez elumet
Eno dirac ar Werc'hez ar goulou binniget ;
Eur beden hir goude-ze, hac eun dro d'an Ilis,
Gant kalz war ho daoulin noaz : ar feiz a zo diskui.

Bréman da noz, kristenien, klevet petra vo great :
Ne d-eo ket a-walc'h klevet, c'hoaz a ve red gwelet ;
Peger kaer Prosessiou, peger sklear ann nos !
Peleac'h gwelet kaeroc'h tra nemet er barados ?

E penn ar Prosessiou merc'bed gwisket e gwenn ;
Ar belerinet goude gant peb a c'houlaouen :
Peterined Gwir-Sikour, c'houi a zo kristenien !
Pebez burznd a welam, burzud ar gwir greden !

Goude-ze ar botred kre, pennadou bleo gant-ho :
Sellet-ho gwisket e gwenn ; pebez gras evit-ho !
Ar Werc'hez zo war ho skoaz dre ar ruiou douget ;
Ha mar renk ar skoaz plega, ar feiz na blego ket.

Pa z-omp brema war leur-ger, sellomp peger kaer tra,
Gant tri zantad war eunu dro, bolz ann euv a sklaera ;
Tan a zo er prenestou, ha tan e dourn ann holl ;
Hag ann ora pro nobis, he-nez a zo dreist-holl !..

Peger kre ar feiz breizek gout a rit kristenien :
Na noz na deiz ne skuizo, ha ne gousko taken :
Bremen da c'hortoz ann deiz an holl belerined,
Gourvezet war ar pavez, a gan joauz bepred.

Da c'houlou deiz eur belek ha kloc'h ann oferen
A laka ann holl war droad ; ha goude ar beden,
Ho c'himiad da Wir-Sikour a reont a galoun :
Ha gras d'eomp da zont da vloaz da welet ann Itroun !

I. V.

(Propriété.)